

YF_0116_Pennherez ar miliner

Pennherez ar miliner dimeus e wreg kentan (pennourez)
'gasas he zad a-gostez hag a lavaras dezhan

"Me ho ped, o ma zad, emezi pa valiet ed-du
o da viro danvez ar c'hrampouezh pa gaviet ho tu."

"Pelec'h ma merc'h emezan 'mo me na bleud na brenn
P'eman ar c'hloareg dindan pe e vreur war ar gern."

"Laosket met emezi, me o c'haso ac'han
O benn ur pennadig aman me 'zistago de(zho) o c'hezeg

Me a zistago de(zho) o c'hezeg ha laosko da vale
Ha 'benn ur pennadig goude me yay da lared de(zho).

Terrupl oc'h paotred emezi terrupl ha disoursi,
Distaget eo deoc'h ho kezeg ha laosket da vale.

Distaget eo deoc'h ho kezeg ha laosket da vale
ya gant ur vandenn kailhoc'hed a zo tremenet aze."

"Laosket 'ne(zho) eme ar c'hloareg n'aint ket da bell vro
P'on-do malet hon sac'had, en un tu me o c'havo."

P'eman leun [malet] ar sac'had ha touchet an arc'hant
Eo bet klasket ur gomer dont d'evan gwin ardant

Mont a reint d'an ostaleri en ur gontan o doare
O petra a gemerit-c'hwi ma gomer rak me am-bo lodevi

Hennezh zo un dra a gas nerzh ha gouezh en on izili
Met dre forzh derc'hel evan dont a reomp da vezvin.

Pa oa karget o bouzellou e oant aet war ar ru
'oant ket evit bale gwall-blaen, brallan a raent an daou du.

Unan 'ne(zho) a lavare: "Ha poent eo mont d'ar ger."
Hag eben a lavare: "Me 'm-boia me foar d'ober.

Ha me 'm-eus c'hoazh da brenan soavon rousin ha hollen,
Hag ar butun a zo manket e-barz ma zabatierenn.

An davanjer a oa kollet hag ar vrozha a oa freget
Hag ar c'hoef un tammig bihannig e-barzh an drez a oa staget.

"Debret 'm-eus ma zakezenn ya gant ur strouilhenn draou.
Da betra in-me breman ? D'ober marc'hadourezh koefou.

Kanet gant Marsel Guillou. Laraven.
Serret gant J.Y. Thoraval, 1976.